

E T A L L

**ILIZ SANT - JOSEPH, E KEMPER**

1881

**Diskan**

E tal ho iliz kaër meurbed karet,  
 En em strinkomp d'han daoulin gant respet ;  
 Chilaouët pedennou bobl Breiz-Izel,  
 O sant Joseph patron 'n iliz santel !

1

Gant eur spont vraz ma goad zo stravillet,  
 Hac gant koler ma c'horff oll n'heuz krenet,  
 Pa m'heuz guelel an abomination  
 Commetet en ho ty a oreson.

2

Torret ho d'heuz an hor gant ar voual,  
 Hac kasset kuit vel Herodez gueisc'hall,  
 Jesus gant sant Joseph, e dad-maguer,  
 Hac hon Tadou pedi harz an aoter.

3

Stanket d'heuz en despèt d'ha bep lezen  
 An iliz savet gant hon aluzen,  
 Skrivet var an hor gant dorn miliguet :  
 « Tec'het pell ac'hant dre urz ar Prefet. »

4

Diffennet eo dont aman d'ha bedi  
Hac d'ha sant Joseph kana meuleudi,  
N'ha klevot muy ar c'hloc'h en tour o son,  
N'ha vo muy prec'h aman, muy mission.

5

Mouez skiltr ar c'hloc'h-se hac ho kanaoen,  
Roe deomp-ny droug kalon hac poan ben,  
Tud var ar meaz c'hui zeue re zesket  
Er skoll bep bloaz gant ken braz doctoret.

6

Chapel fontet don en douar kalet,  
Ho mogueriou gant granit zo savet ;  
Donoc'h eo antreet en hor c'halonou  
Ar zonz deuz hon evurussa deziou.

7

En hon touesk peb den n'heuz c'hoaz memor  
D'ho kuelel 'vit ar veisch kenta digor.  
Nnac kaër e voa o kuelel en deiz-se  
En dro deoc'h gant kement a vugale !

8

Ouspen daou mil voamp enno assamblet  
Ebarz ho kreiz, 'vit klevout hac guelel  
Eur belek santel, prezeguer dispar,  
De Lezeleuc (1) tiskleria deomp ho kloar.

(1) An Aotrou de Lezeleuc, neuze chaloni, hag abaoue  
maro Eskop Autun, a oa bed o preck an devez ma voa  
biniguet iliz Sant-Joseph gant an Aotrou Eskob Sergent.

Eskob karet, c'hui brometas d'hor Mam  
E vije chomet bepred neve-flam  
E c'harantez e kreiz hor c'halonou.  
— Ya, eskob, n'hy zalc'h d'ho promessou.

Rak-se pockan d'han treuziou biniguet,  
Gant karantez hac eur galon mantret.  
O treuziou sacr, c'hui a zo c'hoaz glibet  
Gant daëlou hon Tadou varn'hoc'h skuillet (1).

D'ho exempl, keit ha ma vezo eur men  
N'hy a bocko, n'ha pa vo d'ho poutren,  
N'hy a bedo en diveaz an iliz.  
Palæz Doue er bed man n'heuz frankiz!

Harpel fell deoc'h na vo ann aoteriou  
Fardet gant fleur hac gant ornamanchou.  
N'hy o stigno en diveaz tro var dro,  
Kaëroc'h dirag ann oll hint a baro.

Huz dan hor dall n'hy a zavo eun trôn,  
D'ha zant Joseph, d'ha Vary hon Itron,  
Hac 'vit diskuez e talc'homp mad d'ho c'hloar,  
En dro d'ho zrôn n'hy zevo goulou koar.

(1) Dre ma voant stlenjet er meaz, an Tadou en eur dremen a biou dor ho chapel dija siellet, en em strinket d'ho daoulin evit ober eur bedennic ha goude a bocken d'han douar.

44

Pa zeui miz Maë, pa zeui dous an amzer,  
Deuit costik noz, ha deuit c'hui alc'hueder,  
Deuit oll d'ha kana en dro d'ar chapel man,  
Kanit c'hui, pa n'hell muy an orgraon kan.

45

Var bec an tour lec'h ma ar c'hloc'h laouen  
Ra zeui euz an envou eur goulmic ven,  
D'ha c'hervel mintin mad peb kristen  
D'ha Sant-Joseph d'hont ober e beden.

46

Ha c'hui, Tadou missionerien Breiz,  
C'hui brema trubuillet evit hor Feiz,  
Gant ho vertuziou, skiant hac douster,  
Ho p'heuz chanchet kalon meurt a bec'her.

47

Parrez Plougastel, Ploujean, Plouigneau,  
N'hy neuz dalc'het sonj euz ho kentelliou ;  
An avel a zoug dreist hor stankennou  
Hano 'n Tad Rot, Tad Forestier d'an envou.

48

Hac n'hy paroissianet Ploudiry,  
Keit a ma chomo ebars e bep ty  
Eur grucifix, eur vedalenic queor  
Deuz hon Tad Rot n'hy no ive memor.

49

Paotret Tregunc, Conq, oll euz bord ar mour,  
Gant pebez præz n'hy loske hor labour

Evit galloud heuil gant joa pen-da-benn  
Prezegou kaër hon Tad Moign hac Bleuzen.

20

Ra zeuint c'hoaz d'hor bro ar Castel-Nevez,  
Gant ho douster hac gant ho c'harantez,  
O Tad Kervennic, ô Tad Forestier  
Deuit c'hoaz d'ha konsoli ar pillaouer.

21

Ha c'hui ganet ha bed en hy belec  
En hon Eskopti kaër a Zant-Briec,  
Tad Monjaret, missioner Arvor,  
Parrez Trezelan ho karr 'vel d'he fastor.

22

Keit ha ma vo eur guele en hon ty  
Hac var an dol bara du d'ha zibry,  
N'hy roïo deoc'h euz ar guella loden,  
C'hui pehini n'heuz hor groët kristenien.

23

Parrez Landudal, va farrez karet,  
Euz ho kreiz daou ane hint bed lammet ;  
Dalc'het bepred sonj euz ar blijadur  
Pa'oue kleout an Tad Coniat, Arzur ! (1)

(1) An Tad Coniat hac an Tad Arzur a voa oc'h ober mission e parrez Landudal en amzer-se. Hac eun devez e kreiz ar mission en eur zisken deuz ar gador sermon, en daoue renket lavaret kenavo hac kuitaat. An disparti voa bed kri meurbed.

24

Tad Sant-Alaouarn, ha c'hui Tad Delaizir,  
Uzet ho c'horf, mæz ho kalon zo dir ; (1)  
Goude beza roët nerz hac buez,  
Gant ho peden ret meur silvidiguez.

25

C'hui a chommo en hon touesk bepred  
Doue pehini ho toug dre ar bed,  
'Vit hon derc'hell atao var an hent mad,  
Ho kendalc'ho bepred kreiz e Vreizad.

26

Dispartial eur vam hac bugale,  
Neuz n'met ar maro hac hell kement-se ;  
An harlu, ar prison pe an ankrez  
N'ha rent n'met kresky tann guir garantez.

27

Gouzout reont peguement voac'h karet  
An dud-se digalon hac miliguet ;  
Klasquet ho deuz vel gueischall dha Jezuz  
Ho lammet epad an noz hac dre kuz.

28

Mæz n'ha voa ket an oll eat d'ha repos,  
Hac mignonet voa ganeoc'h 'pad an noz,  
En testeni euz taoliou an Ifern,  
Hac euz gwal droug 'vit galloud ho espern.

(1) An Tad Sant - Alouarn en deuz trivec'h bloaz ha triugent. An Tad Delaizir en deuz seiz bloaz ha pevar-ugent.

29

Enor eta deoc'h-hu paotret vaillant,  
Ouzoc'h-hu n'hy, breudeur a zo kontant ;  
'Vit ma vo gant hor vugale meulet,  
Ha c'hano er werz-man a vo skrivet.

30

Bennoz, Aotrou de Chamaillard an tad,  
Bed deputet hac atao alvocad,  
Den nobl ha muioc'h c'hoas den kalonek ;  
Aotrou Cropp, barner, hac Rossi, belec.

31

Ra vint meulet Salaun, de Kerangall  
Lak gant ho skrid draskal dent an dud fall,  
C'hui pere voa pen hor pelerinaich, (1)  
Enor deoc'h brema evit ho kouraich.

32

Ha c'hui den nobl, muyoc'h c'hoaz den kristen  
Diou weisch gloar d'han Aotrou de Goësbrien ;  
N'ha viot ket ankoët er werz-ma,  
Jacques Ros, guinidik a Kommana.

33

E koumpagnunez tud ken kre er feiz,  
N'hy a bedo hac esper bemdeiz  
Mont eb dale d'ha kana c'hoaz henor  
D'ha Sant Joseph *leiz e Iliz digor !*

(1) Aman e komzer ouz Pelerinaichou groët gant hor  
bro Breiz-Izel d'an Itron Varia Lourdes.

Guelet brema ho labour deputet,  
C'hoi pere d'hon diffen a voa c'hozet :  
Arnoult, Hemon, Nedelec, de Pompry,  
Swiney, Guyho, c'huec'h deuz memez parti.

Ho hano, e histor Breiz vo merket  
Gant goad hac var baper kaon skrivet,  
'Vit ma hello an oll klevout hac len  
Ez oc'h bed traic'h d'ho pro, d'har Feiz kristen !

BARZER KERDEVOT.

*E Gouel Immacule Conception ar Verc'hez 1880.*

